



G W E R Z

PERRINAN AR MIGNON

War eun ton trist.

Er bla mil seis kant pemp ha pevar war ugent,
Er guer a Lannhuon ec'h erruas eun exempl
Gant eur certain domestiques a oa o servichi
Er guer a Lannhuon, enn eun hostiliri.

C'herruas daouvatoutier da c'houlen koagnia,
Ar vates Perrinanik evit ho servicha ;
Salokroas, eme an hostises, salokroas, ne n'ei ket
Seiz vla-so man em zi na deus ket servichet.

Pa voa et Perrinanik evit o diservichi,
Kalon ann daou vatoutier iaouank a vrille diout-hi
Pa deus o c'hoanio debret, hag ko skoden peet,
Unan deus ann aotrone a nevous lavaret :

An noz zo teval ha du, al loar ne n'eo ket skler,
Ar vates Perrinanik, hon c'honduo d'ar guer ;
Ar vrek-man oa eur vrek vad, karguet a vadelez
Alum golo n'eur letern, a ro nezan d'he mitez.

Pa oant sortiet ac'hane, c'haru eur pennat deus ann t
Unan deus ann aotrone a disroas out-hi :
Perrinanik ar Mignon, ouzint-me he sentfet,
Lazan refet ho kolo, ho letern e kuset.

Aotrone, emezi, m'ar gueo evit kavet ma henor,
Ma zivisquet en noas, ma zolet barz er mor,
Me meus eun heont belek o chom en Lannhuon,
Ha ma kleofe kement-se, a ranfe he galon.

Ha penos, aotrone, ho kondufen d'ar guer
Ma me lazet ma golo ha kuzet ma letern skler...
Perrinanik ar Mignon, ouzint-me he sentfet
D'ar guerik a Voutroulez guenimp-ni he teufet.

Ni nemp heno eur werrep o terc'hel hostiliri
Ar c'hentan de ar guin gnellan a gueffet en he zi ;
Bea zo guin ru, guin guen, guin guen ha guin skleret ;
Ar c'hentan deus guin Bourdel a ouffet da gavet.

Oh ! salokroas, emezi, c'houlan ket o kuin guellan,
En ti ma mest a zo ive ha pa garan he c'hefan :
War chouk e c'hil, he bisach hint o he deus distroet
Ilen bordik ar rivier hint e deus-hi tollet.

Ar vreg-man oa eur vreg mad, karguet a vadeles,
Voa chomet oar ar bale d'a c'hortos he mates :
Fa zonas eunek heur anter, ann anter nos sonet,
Ous kroec'h gant ar vinz neuze e c'he bed piguet.

Terrubl, aotro ar Gommun, e kousket dizoursi,
Ar vates Perrinanik, ne n'eo er guer arri ;
Pera ve din kaus, emezan, n'he gousken dizoursi,
Me a meus eur breur belek ha oferinio witi.

Me e meus eur breur belek o chom ebars en ker
Hag a oferinio ewiti dirag auter ar Rozer
Hag a oferinio ewiti dirag auter ar Rozer ;
Ma he bolante Doue e retoano d'ar guer.

Diskenn a eure ac'hane, mantred he oll vembre,
Ho sevel d'ar Marc'hallac'h, ac'hane d'ar buto,
Ho sevel d'ar Marc'hallac'h, ac'hane n'ar buto,
En kichen Zantez-Anna e c'havas-hi maro.

Aotro Doue, ma Doue, ha possibl e ve
Ve ma matez Perrinanik a ve 'r guisse-se ;
Piou enn deus da valtretet ha da rente er guisse-se ?
Er bed-man pe er bed-all e damanto he ine.

Mont a res ac'hane da di ar vatoutierrien,
Da gleuet ar vuirione , vel ma oa pen-da-bed ;

Bonjour e meï, aotrone, bonjour d'ec'h a laran
Ha ma matez Perrinanik, aboë 'n noz divezan ?

Ho mates Perrinanik, c'hi a voa et d'ar guer.
Souhetet defoa dimp ar bonsoir, ha laret ken-en-ber,

Me ho ped, servicherien, pere arenk servichi,
Da bedi Doue u'ho kalon, hac ar Verc'hes Vari,
Da bedi Doue n'ho kalon, hac ar Verc'hes Vari,
Ann Itron Zantez Anna ha Zant Iann ar Vali ;
Me ho suppli hostigen, hostizeset ive,
Na leket ho mitigen da conduit aotrone.

(Propriété.)

